

(84)

Histor
 Blancha a Gremeur
 ha
 Charles Tremeleuc,
 Patronet ar prijeou nevez.

Var ton : Guillaume Calve din leveret.

(85)

En bro Guerand goechal e voa bet
 Eun Autrou eus a Gremeur hanvet. (bis)
 Atao e vije bars er brezel,
 Ha cazi james en e gastel. (bis)
 Eun deiz er gombat goal exposet,
 Gant eun tol cleze voe discaret. (bis)
 An itron ar c'hêlou na glêvas,
 Souden gant glac'har vras a varvas. (bis)
 Ne chommas en Gremeur var o lerc'h
 Da vestrez, nemet Blancha, o merc'h. (bis)
 Goal yaouanqic e voa Blancha c'hoas,
 Rac n'e devoa nemet pempzec vloas. (bis)
 Eur gouarnerez a voa ganti,
 Evit gomer soign demeus an ty. (bis)
 Tremeleuc, intendant a voa c'hoas,
 Mes rentet dija en eun oad vras. (bis)
 Allas! n'oa na nobl na pinvidic,
 Mes bez' en d'oa eun tenezor magnific. (bis)
 Gouell equet an aour, an oll denvez
 E carrie meurbet e vab Charles. (bis)
 Ar sir a Gremeur aroc mervel
 A scrifas d'e verc'h en he c'hastel. (bis)
 Recommandi reas d'ei Charles,
 Ha caout diountan soign da james. (bis)
 Charles en d'oa tost da drivac'h vloas,
 Brava den yaouanc a voe biscoas... (bis)
 Blancha a voa coant ha caer meurbet,
 Charles gant an oll voa admiret. (bis)
 Malheur d'ay insolant a gredje

Sellet adreus e vestrez neuze. (bis)
 Pa voe da ugent vloas eruet,
 Da zont d'e zemezi voe comzet. (bis)
 Offret voe deñ eun bennerer coant,
 Hac e d'oa calz aour hac a arc'hant. (bis) (86)
 Charles d'e zönjezon zo fidel:
 E oll garante zo er c'hastel. (bis)
 Eun deiz, tro vardro voat oll en joa,
 Rac an deiz a vloa Blancha a voa, (bis)
 Eun niver bras a dud voa deut prest;
 Er c'houst bras ar c'hastel voa ar fest. (bis)
 Adrec Blancha e chommas Charles,
 Da zervicha gant soign e vestrez. (bis)
 Gergent eun manac'h, quisset en quien,
 A ziselarias deñ e flaneden. (bis)
 Abars an tri bloas, va demerzel,
 C'houi vo demerzet en ho castel. (bis)
 Hac ho pezo neuze, vel hirio,
 Er memes plas - man oll tud ar vro. (bis)
 Charles Tremeleuc hegen trist bras,
 Ouz ar manac'h quien a c'houlennas: (bis)
 Autrou manac'h, m'ho ped, lavarret
 Pieu an den eürus vo preferet? (bis)
 Unan ar quisien eo a vezo:
 Laera cavalier demeus ar vro. (bis) (87)
 — Oh! eme Blancha, n'ho credañ get,
 Daoust ma zön amañ dre oll garet. (bis)
 — Ne man get pell demeus ho castel;
 Courajus bras e vo er brezel. (bis)
 — Oh! quilla - ze, Autrou, emezi
 Crén, ma cléve Charles anezi. (bis)
 Charles Tremeleuc neuze gergent
 A c'houlenn conje da vont en hent. (bis)
 — O Charles! eme Blancha dezan,
 Ha n'en doc'h-hu get eürus amañ? (bis)
 — Re eürus, allas! ò va Doue,
 Rac me rofe vidoc'h va bue. (bis)
 Me fell din beza soudard breman,
 En quis Breiziad vaillant, ma ellañ. (bis)
 Hac e rin, m'en assur, peb effort
 Da zervicha mat an Duc Montfort. (bis)

- (88) Hac en creiz ar c'harnach ar goassa
 Ho memor a vo va zonch brassa. (bis)
 Berza dign ouzoc'h eo va oll c'hoant;
 Ho sonch hepgen am rento vaillant. (bis)
 — Kit, eme Blancha, gant calonad:
 Bezit courajus en gvir Breiziad. (bis)
 Diouc'h-tu e parti evit Gvienet,
 El lec'h ma voa ar arme campet. (bis)
 A bep tu e teu d'an Duc sikour
 Enep Charles de Blois, e adversour. (bis)
 Gergent ma zeo Charles partiet,
 Autrou Kermosa zo eruet. (bis)
 — Debonjour dèc'h, Blancha a Gremeur;
 Plijout dèc'h e ve va oll boneur. (bis)
 — Fachtet bras oun, autrou Kermosa:
 Da euy all a meus grêt promessa. (bis)
 Tud chentil yaouanc all zo deuet,
 Mes oll gant Blancha voent refuset. (bis)
 Bez' e zorat hed daou vloaz tremenet,
 Hep clevet ouz Charles comz ebet. (bis)
 E dad a varvas. Blancha Gremeur
 A zonch er mab bemdez ha bep heur. (bis)
 Er blenen a Alre voe neuze
 Eur vataill ar goassa d'ar c'houly-se. (bis)
 An duc Yan Montfort, gant courach vras
 Ouz Charles de Blois a gombattas. (bis)
 Euy arrach horrupt voa en o c'kreiz,
 Da c'hout pïou a vije mestr en Breiz. (bis)
 Eur zoudard, adversour da Vontfort,
 D'e larza a ra e oll effort. (bis)
 Charles Tremeleuc d'ar zoudard-ze
 A dreuz e galon gant e gleze. (bis)
 An Duc a Vontfort, anaoudec bras,
 Charles Tremeleuc a hanavas. (bis)
 Anfin, Yan Montfort, gant euy tol crenn
 A larzas de Blois var ar dachen. (bis)
 Evit rêi ar bloa dèc'h da entent,
 En trizec cant pèvar tri-uguent. (bis)
 Oll arme de Blois zo deroutet,
 Hac adreus hac adras a zo èt. (bis)
 Goude ar victor e voe dançou,
- (89)

Hac ive stourmerez bras lançon. (bis)
 An noblañs, an oll itronezet
 A voa vit ar gouel en em rentet. (bis) (90)
 An Autrou an Duc pa antreas
 O velet Blancha a lavaras: (bis)
 Ma ven me trec'hour er stourmerez,
 Me voar pion a ve va rouanez! (bis)
 Autrou Kernosa eno ractal
 A deu var Blancha da gaquetal. (bis)
 Mes eun dey en eur c'hoign er selaou,
 A gri a boes penn: te lavar gaou! (bis)
 — Blancha a Gremeur, me er zouten,
 Eus an oll merc'hed zo ar fleuren. (bis)
 Gement toud fall outi a gorzo,
 Gant va c'hleze m'en dislavaro. (bis)
 An oll chevalierien estonet,
 Gant eur goler vras zo distroet, (bis)
 Hac e scrisjont meurbet insolant:
 « Stlapit prest ermes ar c'hos payasant. » (bis)
 Mes an Autrou an Duc, pa o c'hlevas,
 Gant autorite a lavaras: (bis)
 « Na douchit en nep seurt an den-ze, (91)
 » Rac dezñ e tleñ va bue. (bis)
 » En bataill Alre eo e teuas
 » D'am savetat, dre e gourach vras. (bis)
 » Deus en divrac'h, chevalier vaillant:
 » Goulen ouzñ ar peñ ac'h eus c'hoant. » (bis)
 Goustadic entreze e comsijont,
 Mes n'eljet gout petra 'leverjont. (bis)
 Charles Tremeleuc zo sortiet
 Sioulic, hep lavaret quer abet. (bis)
 Gergent e son an oll drompillou,
 Hac e commañs stourmerez lançon. (bis)
 Calz chevalierien zo preparet
 Hac ebar el liç n'em bresantet. (bis)
 Mes pequeument voet estonet bras
 Gant eur chevalier caer, p'antreas! (bis)
 Bouclier an Duc Montfort a zouque,
 Ar peñ meurbet oll a estone. (bis)
 Ornet voa eus eur cintureñ glas,
 Hac en e zorn deo eur c'hleze bras. (bis) (92)

Gement chevalier en attage
 Gant e gleze en o discare. (bis)
 An Duc e gourach vras fra velas,
 Achui ar stourmerez a reas. (bis)
 An oll er pedas eno zouden
 Da zont da lemel e vizieren. (bis)
 Oh! pequer bras voe ar soiez, ar joa...
 Rac Charles Tremeleuc eo e voa. (bis)
 Blancha a Gremeur voa laouen bras,
 Hac a hije gant joa he franch glas. (bis)
 Tud chentil a voe meurbet jalous,
 Mes ne gredent get dont da c'hourdrous. (bis)
 Oh! neo get c'hoas Charles Chevalier
 A c'hrosmolent oll en o c'holer. (bis)
 — Abaoue un heur eo recevet, »
 En deves an Duc dê respontet. (bis)
 — Charles Tremeleuc, scouer ar vaillant,
 » Te a vo grêt nobl gant Roue Franç. (bis)
 » Dal va marc'h ha gemer va c'hleze;
 » Te vouio n'em zervich aneze. » (bis)
 — « Autrou ? » Duc, permetit din brema
 » D'ober eun appel bars er stourm-mâ. » (bis)
 Disfiout ras ar chevalerien
 Da stourma outain var an dachen. (bis)
 Mes nicun a grenn n'em bresantas,
 Hac ar gurunez a recevas. (bis)
 Var benn Blancha Gremeur er lacas,
 Dirazi neuze e taoulinas. (bis)
 Blancha a laca en e querc'hen
 Eur c'holer caer eus a aour melen. (bis)
 Demerzi reas hep dale pell
 Da Vlancha Gremeur en e c'hastel. (bis)
 Cetu, eme Breizis, recompanz
 Accordet gant justis d'ar vaillant. (bis)
 Pa voent rentet côs legjont sevel
 Tost da gastel Gremeur eur chapel. (bis)
 En eur zantelez vras e verzjont,
 Hac er memes devez e varvjont. (bis)
 An dolmen eller hirio quielet
 Er plas m'cent goechall enteret. (bis)
 Eno qerqent an nôs eveler

(93)

(94)

148

O pedi yaouanqis ar c'hartier. (bis)
 Erit obtey ar c'hraç ma elfont
 Demezi d'ar re a garont. (bis)
 Doue da rêi dê oll boneur
 Tremeleuc ha Blañcha a Gremeur! (bis)

A. Lédan.

Extrait du roman Donatien
 par Pitre Chevalier.

(Vol. VII, p. 84-94)
 strophes non numérotées.